



# GUERS SANT COULEM, PATRON EUS A BARRES PLOUGOULM.

---

Var ton ar Cananeen.

**S**AVIT o mouezyou, Plougouloumis,  
Canit ur vers so composet  
Var ar vuez à Patron oc'h Ilis :  
Canit-i gat joa a respect.  
O Tad eo , a c'hui e vugale ;  
Oc'h enor eo e enori :  
O protector eo dirac Doue ,  
O tever eo e invoqi.

O Sant bras , ô Sant Coulm binniguet ;  
A c'hanoc'h-u eo e coumsan ;  
Humblamant , à gorf ag à speret ,  
Dirazoc'h en em brosternan.

O pet ar vadelez , m'o suppli ,  
 Evidon da veza indin ,  
 D'am sicour oc'h-unan da veuli  
 O fantelez ag o toctrin.

D'em en nord da Escopti Leon ,  
 En doun-vor à c'hann meur à leo ,  
 E costez cuz-eol bro ar Saoson  
 Eus un Enes ; an Islantr eo .  
 Ar feiz eno a oue prezeguet  
 E pempet canvet an Ilis ,  
 Ag an darn vuya convertisset  
 Gat an Escop bras Sant Patriç .

An Islantret a oue quer fervant ,  
 Quer fidel e servich Doue ,  
 Na c'halvet o bro communamant  
 Nemet Enes ar Sænt goude :  
 Ag a c'hano prest e fortias  
 Lies Abad , lies Escop  
 Pere ive a santifias  
 Lies Countre eus an Eurôp .

Er bloaz pemp cant unan-varnugnant  
 Eus à vis Qerzu an eizvet ,  
 En Enes-se Coulm eus a guerent  
 Ar re nopl a oue ganet :  
 Anyou e dud m'ar o desirit ,  
 Chetu-i deoc'h o daou ama :  
 E dad a yoa galvet Fedilmit ,  
 Ag e vam anvet Ethnea .

Sant Coulm en deus brema daou anno ,  
 Unan Coulm , un all Coulouman :  
 E ano veritabl , Coulm eo ;

Dabord n'en doa nemet eman.  
 E bro Saos eo bet goude galvet  
 Sant Coulouman e leac'h Sant Coulm ;  
 Mæs e ano mad so conservet  
 Er vro-mân e Parres Plougoulm.

Ar buguel Coulm eus à zourn Doue  
 Envel un tensor precius  
 Gat e dud recevet a oue  
 A scolyet mad a sourcius :  
 E leac'h clasq e renta pinvidic  
 Ag un Digentil bras uhel ,  
 Christenien oant , ag à vianic  
 en renfont ur c'hristen fidel.

Quentel caer deoc'h , tadou a mamou ,  
 Da zic'horren o pugale ;  
 Neqet avoualc'h deoc'h destum madou  
 Da lèsel gato o coude.  
 Desqit dezo non pas goual langaich ;  
 Goual exempl , na guizyou mezus ,  
 Mæs eus o c'henta bugaleaich  
 Caret Doue , beza vertuzus.

Coulm en devoa bet digat Doue  
 Ur speret lem , ur galoun vad ,  
 Ag à vianic a brosite  
 Cals e scol e vam ag e dad :  
 E zescadurez ag e squiant ,  
 E vertuz ag e santelez ,  
 Dre ma cresqe , a gresqe patant  
 A vel lagad ive bemdez.

Clevit , imittit , bugaligou ,  
 Diouc'h Sant Coulm patron qemerit ,

A scol o tadou ag o mamou  
 Eveldan docil profitit :  
 Desquit ervad o religion ,  
 An honestis à vianic ,  
 Ur vicher diouc'h o condition ,  
 Gat qemense ouc'h pinvidic.

Sortiet à scol ar vugale ,  
 Desqet mad e oll creançou ,  
 Ar Sant yaouanc a yas eb dale  
 D'en em gonsacri d'an Autrou :  
 Var dro an oad.eus a bemzec vloas  
 E fortias à dy e dud ,  
 Ag en ur Gouvent en em rentas  
 Evit beva er solitud.

En Enes Islandr oa d'an ampoent  
 Un Abad brudet dre ar vrô ;  
 Scol ar santelez oa e Gouvent :  
 An Tad Finnenn oa e ano.  
 Coulm oc'h heul an inspiration  
 D'en em rei antier da Zoue ,  
 En em lacâs e direction  
 Ag e scol ar mæstr fintel-se.

Eno en em rent e berr amfer ,  
 Ur squer parfet à beb vertus ,  
 Modesti , humilité , douçder ,  
 Oud an oll un ear gracijs ;  
 En andret Doue feiz ag esperanç ,  
 Ag an denera carantez ;  
 D'ar regl , d'e vistri obeiffanç :  
 Exempli an oll oa e vuez.

Plijadur , deliçou e galoun

Oa medita an traou divin :  
 Re verr oa an deiz de oræfoun  
 Ag an nos oll bet er mintin.  
 Varfao e veze an diveza  
 Pa gouveme momed repos ,  
 A varfao e veze da guenta  
 Mintin c'houlou deiz an tronos.

Neqet eb ræfoun oa Coulm galvet ;  
 Ar goulm fo squer ar burete ,  
 Symbolenn an innoçanç parfet ,  
 Figurenn ar simplicite :  
 Sant Coulm a yoa pur ênvel un Æl ,  
 Envel ar goulm simpl , innoçant ;  
 A d'en em viret pur a fintel ,  
 En devoa prudanç ar farpant.

Mortification ar speret  
 Da vrida e bassionou ;  
 A da jugi ar c'horf revoltet  
 Ar yunou , an disciplinou ;  
 Sanceç labourat , lenn pe bidi ,  
 An douar yen evit guele ,  
 James momet da feneanti ,  
 Chetu'n armou en dioualle.

An devotion so veritabl ,  
 E leac'h renta'n den brusq , faichus ,  
 A rent e vanyelou agreabl ,  
 Ag e broposyou graciis :  
 Sant Coulm quer criz outa e-unan ,  
 A yoa oud an oll beb mare  
 Douç ag egarat ênvel un oan ,  
 Ag an oll drese er c'hare.

An decvet bloaz a yo a o redet  
 Aba edo en e gouvent :  
 Edo en oad da veza bèle  
 En e bempet bloaz varnuguent :  
 Receo a reas ar vèleguiaich  
 Gat fantelez a ferveur vrás ;  
 A Couvent Diare , pe Dairmaich ,  
 Qer buan goudefe a fountas.

En em rejouisset , Islantret ,  
 Chetu deoc'h ur c'healou à joa ,  
 Un eol brillant eo a so savet  
 O vont varnoc'h oll da bara.  
 Coulm Abad en e gouvent nèvez ,  
 A feuill à c'hano tro-var-dro  
 Ur sclerigenn à silvidiguez  
 Da favetei oll dud o pró.

Dre e avisou ag e sourci ,  
 Couvent Diare a anjandr  
 Lies Couvent , lies Abati  
 E meur à gorn eus an Islandr ;  
 Ag envel un tad mad a tener ,  
 Coulm a deu da bourvai dezo  
 An oll sicourou so neceſſer  
 Evit gouarn mad anezo.

Den apostolic , Abad santel ,  
 En em breparit d'ar goumbat ;  
 An ifern ag ar bed criminel  
 A rai ar brefel deoc'h timât :  
 A viscoaz ar bersecution  
 So partaich an dud vertuzus .  
 Neceſſer eo an dentation

Da eprouvi ar guir vertuz.

Er c'hours-se e bro an Islantret,  
en ur c'hountre eus an Enes,  
E zoa ur Roue, Dermith oa anvet,  
Dizurz a yoa en e bales.

Eb damant ebet d'e galite  
Ag eb respet humen ebet,  
An Abad Coulm gat feverite  
A vlammas e vuez direglet.

Allas ! an dud vraſ a pinvidic  
A fo eas o disoblja ;  
Brassounius int a briminic ,  
A prest e teuont d'en em faicha.  
Ar Prinç Dermith gat Coulm reprenet  
Rustumant eb e venagi ,  
A zeu ênvel un den scan bennet  
Gat un arme d'en em vengi.

Leun à furor e penn e arme ,  
Envel ur c'hi clân en arraich ,  
E faill d'ar garter an den Doue  
Ag e toug partout ar c'harnaich.  
Ar venjanç fo ur mounstr divoder ,  
E oll joa eo an droug brassa :  
A Dermith outret en e goler  
A guerz ar maro dre ma za.

Esqueb ar vro en o melcouni ,  
Ag an Abadet tro-var-dro ,  
A vlamm oll Coulm eus e rustoni ,  
Er galv penn caos ruin ar vro ;  
Ag en em assamblet e Concil ,  
Er c'hondaonont oll à ur vouez

Davont dre binigen en exil  
Prountamant e meas an Enes.

C'hoas e zoa Enesennouigou  
A instruction izoumec ,  
Tost d'an Islandr hed ar c'hostezyou ,  
D'Hy en exilont da brezeg.  
It , emezo , it , saveteit  
Eno qellies a bayen  
A ma zouc'h bet ama da Zermith  
Qiryoc da laza a gristen.

D'an ampoent Finnen e vestr qenta  
A yo a great Escop à Glunard ;  
Mont a ra d'e gaout da Qimyada ,  
A d'e gonsulti en ecart.  
Dre guzulyou an Escop prudent ,  
A dre avis e vignonnet ,  
Coulm humbl , docil , ag obeissant ,  
A barti eb dale camed.

Chetu merc ar guir devotion ,  
Caracter ar guir santelez ,  
Docilite a soumission  
D'an tad , d'ar vam , mestr pe vestres .  
O ! c'hui oll pere so sujedet ,  
Servicheryen , pe bugale ,  
Desqit oud o superioret  
Senti docil e guel Doie.

En nord d'an Islandr oa un Enes  
A yo a galvet an Enes-Hy :  
Eno oa cals à dud divadez  
A yo a izoum d'o instrui.  
Ar Sant eyeus e vro chasset ,

A barti dre bunitioù,  
Evit ober d'an infidelet  
En Enes-se ur mission.

Sin ar groaz laqeat en e guerc'hen ,  
Ar Bibl sacr dindan e gasel ,  
Dibourvae à beb sicour humen ,  
Envel guechall an Ebrestel ;  
Eb qen fizyanç nemet e Doue ,  
Qen arm nemet ar Grucify ,  
E za da savetei o ene  
Da habitantet Enes-Hy.

En Enes-Hy de qenta disqenn  
Ar Missioner exilet  
A brezeg dabord ar binigenn ,  
A Jesus-Christ crucifiet.  
Ar barbaret , an dud divadez  
A zeu d'en em convertissa :  
A sicour a reont en o Enes  
Ur Gouvent deza batissa.

Ar Gouvent nèves e berr amser  
A zeu da veza renommet ;  
A beb leac'h e teu tud forç niver  
Da veza enni recevet :  
An Enes memes eus a c'hano  
Palamour d'ar Gouvent caer-se ,  
E doue pelloc'h evit ano  
En enor Coulm , *Hy-Coulm* goude.

Dija oa calz amser tremenet  
O rei ar reglennou regis  
D'ar Gommunaute nevez savet ,  
Ag o pleustri an Enezis :

Ar bras à Hy rentet christenien ;  
 Ag an Enes oll e repos ,  
 Coulm a choasas eus e zisqipien  
 Daouzec da vont gata da Scoz.

Ar Scoz a so ur Rouantelez  
 Situet en nord da Vreiz-veur ;  
 Lies traonyen , a lies menez  
 A so eno a lavareur :  
 An habitantet a yoa galvet  
*Piclet* , pe tud yriz autramant ,  
 Abalamour ma vezent peintet  
 Dre veur à feurt liou differant.

Daouzec disqip a reas or Salver  
 Pa goumanças mont da brezeg ;  
 Evit imita ar memes niver ,  
 Coulm a choasas ive daouzec :  
 Gato e zeas da gconvertissa  
 En o c'hoajou ar Bièt et vriz ;  
 A lacat a eure batissa  
 En o zouez meur à Ilis.

Ouc'h penn tregont vloas a dremenais  
 O rei dezo instruction ;  
 Ag an Autrou Doue a vinnigas  
 Poan a fatic e Vission :  
 Coulm a lacâs an habitantet  
 Var an hent eus ar Barados ,  
 Ag a veritas beza galvet  
 An Abostol eus an oll Scoz.

Neqet eb ræfoun , Scotranet ,  
 Eo er galvit oc'h Abostol :  
 È eo en deus d'ar feiz o canet

Dre e bedennou ag e scol.  
 A m'ar o doa bet an Ebrestel  
 talanchou bras à zourn Doue  
 Davont da brezeg an Aviel,  
 Or Sant Coulm en doa bet iye.

Ur Religius anvet Notker,  
 Den Santel a guizyec meurbed,  
 A rapport oa Coulm en e amser,  
 Dre naouspet miracl renommet.  
 Goude'n Ebrestel a Sant Martin,  
 An Tad Notker eo en lavar,  
 E vertuz, miraclou, a doctrin,  
 Sant Coulm n'en doa qet bet e bar.

Eus à berz Doue en doa an talant  
 Envel guechall ar Brofetet,  
 Da bredisa envel traou prefant  
 Traou abell amser da zonet:  
 D'anaout ar mysteryou secrutta  
 En devoa graç a donæsoun;  
 Ag ar santimanchou cuzetta  
 Da lenn e goñelet ar galoun.

Ouc'h penn miraclou a pedennou  
 Da c'houlen sicour ouc'h Doue,  
 E fantelez, e binigennou,  
 An exempl mad a zesqueze,  
 A roe nerz d'e bredisation  
 Da douich ar galoun caletta,  
 Ag a rea un feurt impression  
 N'ellet qet outi refista.

Ar Prinç Lucius ur Roue breton,  
 Ar c'henta Roue christen so bet,

En devoa dija e bro'r Saoson;  
 Breiz-veur en amfer-se galvet,  
 A bell a yoa laqeat diguemmen  
 E veus a Rom en e Stadou  
 Esqeb da brezeg ar feiz christen  
 D'ar vretonnet coz on tadou.

Pebez gloar evidomp bretonet!  
 Qenta Prinç a orgnas e drôn  
 Gat Croaz Jesus-Christ crucifiet,  
 Oue on Roue ni pobl breton:  
 On tad eo bet, a dre hiritaich  
 On eus bet dreiza an enor  
 Da gaout ar guir feiz evit partaich;  
 Conservomp mad un feurt tensor.

Evit m'a c'hententot quememan,  
 Guezit penaos eus on tud coz  
 A berê oump ganet er vro man,  
 Cals a so deuet eus à vro Saos:  
 Ar Saoson deuet eus an Alamaign  
 Var dro creis ar pempet canvet,  
 A reas dezo tremen dre gontraign  
 A Vreiz-veur ama da dec'het.

Var dro fin an ei<sup>l</sup> canvet christen,  
 Hervez dre scrid ma er c'haveur,  
 Eo oa bet deuet Missioneuryen  
 Dre urz Lucius e Breiz-veur:  
 Mæs ar Saoson d'Hy nèvez deuet,  
 A vanqe à instruction,  
 D'ar poent m'edo d'ar Scotranet  
 Sant Coulm oc'h ober Mission.

Dont a eure prest d'en em scuilla

Brud an Abostol bras à Scoz  
 Tro-var-dro er Provinçou pella  
 Dre an oll Rouantelez faos :  
 Quemense d'a Coulm a fournissas  
 An occasion da gaç d'Hy  
 Disqipyen pere a zeputas  
 Evit monet d'o instrui.

Un darn a oue Esqep vigilant  
 Da c'houarn an Escoptiou ;  
 Darn all Abadet fantel , prudent  
 Da regli mad ar C'houvenchou ;  
 A cals re all Missioneuryen  
 Da rei d'ar bobl instruction :  
 Gloar o mestr oue an oll disqipyen ;  
 A gloar an oll religion.

Gat e oll sourci var e speret ,  
 Oll treveill e gorf deiz a nos ,  
 Er Missionou antreprenet  
 Qen e bro Saos , qen e bro Scoz ,  
 Tad mad , superiol sourcius ,  
 Coulm ne anconec'hea hini  
 Eus e Gouvenchou religius .  
 En Islandr , nac en Enes-Hy .

Ur veaich en amfer e tirede  
 D'o guelet a d'o bisita ,  
 D'o c'hourachi e seryich Doue ,  
 Da zerc'hel urz vad e peb tra ;  
 A p'elle caout momed da baoues  
 E repos ag e plijadur ,  
 Oa mont da copia à nèvez  
 Al levriou sacr eus ar scritur .

Meur a gopi gat e zourn scrivet  
 En e Gouvenchou a lesas :  
 Levr ar Salmou a so rapportet  
 An diveza a goumanças :  
 Ar Salm tri a tregont a scrive  
 Pa fantas oa tost e varo :  
 Paouesomp , a lavaras neufe ,  
 Va successor a finisso.

E bluenn e veus e zourn taolet ;  
 E sao davont d'ar gousperou ;  
 Ag er fin d'e logic distroet ,  
 Goude fin an all ofiçou ,  
 Var an douar yen e c'hourvezas ,  
 N'en deva jamæs qen guele ,  
 Ag e zisqipyen oll a c'halvas ,  
 E Couvent Hy edo neufe.

E zisqipyen oll en endro deza  
 Envel bugale gat o zad ,  
 Coulm a ra e qimyad diveza ,  
 Ag ii o diveza qimyad .  
 Bezet , e meza , va bugale ,  
 Gueneoc'h oll , eternelamant ,  
 Carantez , union , peoc'h Doue ;  
 Chetu ase va zestamant.

D'an anternos ar c'hloc'h o seni  
 Da vont da gommanç an offiç ,  
 Sant Coulm ag ên en e angouni ,  
 A so ar c'henta en Ilis :  
 Abarz an offiç , en oræson ,  
 De vreudeur dirac an auter ,  
 En er rei e venediction ,

E rent e ene d'e Grouer.

An navet devez à vis Even  
 De vloas c'huezec a tri-uguent,  
 D'ar bed all e c'heur e dremen  
 Dre varo precius ar Sænt :  
 E gorf a oue dabord enterret  
 En Ilis eus an Abaty  
 Er Gouvent en deva bet fountet  
 En Enefen eveus à Hy.

Gat an amfer oue transportet  
 A c'hano e relegou sacr ,  
 A da Kear doun en Islandr cacet  
 Araoc an nordidi fallacr :  
 An Islandr a ene tri Fatron ,  
 Santes Berc'het , Coulm , a Patric :  
 O zri ouent dr'er mêmes ræson  
 Eno cuzet en un Ilis.

Var dro fin an daouzecvet canvet  
 Ar Saofon o veza mistri  
 Eus an Islandr o doa conqueret ,  
 A gavas ar c'horfou o zri.  
 Ar Saofon neuse c'hoas christenyen ;  
 A eure an dranslation  
 Deiz gouel Sant Coulm an navet Even ,  
 Gat ar vrassa devotion.

An tri Relegou a c'horrojont  
 E doun en Ilis an Dreindet ,  
 Ag eno goude e reposjont  
 Betec ar c'huecvet canvet ,  
 Ma teuas ur viç-Roue den detestabl ;  
 Da zistruja an Ilis-se ,  
 Gat cals à Relegaou venerabl

Perê enni a repose.

Choas Ilis *Sans* a gred couscoude  
 Caout an enor da bossedi  
 Lot à Relegou an den Doue  
 Sant Coulm binniguet Abad Hy,  
 Ilis Plougoulm so siouas privet  
 A avantaich an feurt tensor;  
 Mæs de gaout à beb anciandet  
 Da batron e deus an enor.

Credabl eo darn eus e zisqipyen  
 Deuet an tu ma eveus o brô,  
 Eus e guerent, pe anaoudeyen,  
 O deves goude e varo  
 Digacet d'on tud coz er vro-mân  
 Ar brud eveus e viraclou:  
 A desqet enori anezan  
 Ag invoqi e suffrajou.

Autrou Sant Coulm on eus an enor  
 Da gaout d'or Parres da batron,  
 Dirac Doue bezit or protector,  
 Ni reclam o protection:  
 On tad ouc'h, a ni o pugale;  
 Obtenit deomp, ni o suppli,  
 Ma zaimp oll da varados Doue  
 Gueneoc'h da viqén d'e veuli.

Eus o costez, c'hui Plougouloumis,  
 Evit meritout suffrajou  
 Ar Sant bras so patron oc'h Ilis,  
 Imittit oll e vertuzyou:  
 Bemdez en em er bedit outa  
 Gat ferveur a devotion,  
 A deut alies da visita  
 E dempl gat veneration.

FIN.